



## Kanenn ar c'hinnig :

### Sellit 'ta uvelded hon Aotrou


A.S. Rahm (Graines de Saints)



Meur-dez es - tlam-mus - añ, mad - de - léh soué-hus - añ d'en  
En em i - zé - la - et c'hwi eù - é di - rak Doué 'eit



Eu - tru Doué Mestr er bed 'n em i - zé - la 'eid -  
bout i - huél - aet get - oñ! Gouar-net ni - tra 'eid -




emp bet - ak en em guh - at én un tam - mig os - ti bi -  
oc'h, 'n em prov - et penn - d'er - benn d'en Eu - tru Doué en em ra


### **Diskan :**



han... Sel - let 'ta u - vel - ded hun Eu - tru! Sel - let  
doc'h...



'ta u - vel - ded hun Eu - tru! Sel - let 'ta u - vel - ded hun Eu -



tru! Ren - tet De - hoñ i - nour ho ka - lon - eù.

# Parrez Ker Anna

## Gouel ar Sakramant

2 a viz Mezheven 2024

### Kan digor : Kalon sakret Jezuz, Kalon sakret ma Doue

Entanit ma c'halon get tan ho karante.

1 Jezuz, a holl viskoazh, ennon hoc'h eus soñjet,  
Jezuz, a holl viskoazh C'hwi ho peus ma c'haret.

2 Petra ho touge-C'hwi da reiñ din ar vuhez,  
Petra ho touge-C'hwi nemet ho karantez ?

3 Perak a lein en neañv eh oc'h-C'hwi diskennet  
Er c'hraoù a Vethleem ? Rak m'hoc'h eus ma c'haret.

4 Jezuz, àr ar c'halvar, pe liamm ho talc'he  
Ariet doc'h ar groaz ? Atav ho karante !

### Salud d'ar bobl :

*Ar beleg :* Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad  
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :

**Respont :** Ha get ho spered !

### Asperges: Allelouia !

1 Ha gwelet am eus an dour bev  
É strinkiñ a kalon ar C'hrist !  
An holl re 'vo gwalc'het en dour-se  
A vo salvet hag a gano :

3 Gwelet am eus ivez an Templ  
Digor da virviken d'an holl  
Ar C'hrist a za en-dro get trec'h,  
A ziskouez gouli e gostez.

2 Ha gwelet am eus ar vammenn  
É tont a vout ur stêr divent !  
Ha bugale Doue, holl tolpet  
'Gane laouen a vout salvet :

4 Gwelet am eus ivez ar Gomp  
É reiñ deomp peoc'h hon Aotrou Doue.  
An holl re a gred en e anv  
A vo salvet, hag e kanint :

### Gloria : (Guilloù) Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo ! (2 wezh)

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getoñ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek. Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hedoù ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen ! 1

## Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr an Ermaeziadeg

En deizioù-se e tas Moïz da gontañ d'ar Bobl holl komzoù an Aotrou hag e holl gourc'hemenoù. Hag e respontas an holl dud a unvouezh, en ul lâret : «Gober a raimp an holl draoù en deus lâret an Aotrou.» Hag e skrivas Moïz holl komzoù an Aotrou, hag e savas abred da vintin, hag e savas un aoter doc'h troad ar manez ha daouzek maen lakaet sonn en o-sav evit daouzek rummad Israel. Hag e kasas un nebeut paotred yaouank a vesk maboù Israel da ginnig sakrifisoù peurlosket ha da lazhiñ koleoù bihan 'evel aberzhoù a beoc'h en enor d'an Aotrou. Hag e kemeras Moïz an hanter ag ar gwad a lakaas er beselioù, hag an hanter-all ag ar gwad a strinkas doc'h an aoter. Hag e kemeras levr an Emglev, hag er lenn a reas a vouezh uhel d'ar Bobl ; hag e lârazont : «Holl ar pezh a lâr an Aotrou a raimp hag e heuliimp.» Hag e kemeras Moïz ar gwad hag er strinkas ar ar Bobl en ul lâret : «Setu gwad an Emglev en deus an Aotrou divizet geneoc'h, ma talc'hit d'an holl gomzoù-mañ.» Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

## Psalm 115 : Kalis ar Salvedigezh a gemerin, hag anv an Aotrou a bedin.

Petra a rentin d'an Aotrou  
evit an holl vad en deus graet din ?  
Sevel a rin kalis ar salvedigezh  
en ur bediñ anv an Aotrou.

Prizius-meurbet aveit an Aotrou  
eo marv e dud fidel.  
«Aotrou, mab ho matezh,  
Torret ho peus din ma liammoù.

Profiñ a rin deoc'h ur sakrifis a velasion;  
pediñ a rin anv an Aotrou.  
Seveniñ a rin ma fromesaoù d'an Aotrou  
dirak holl dud e boblad.

## Eil lennadenn : Lennadenn tennet a lizher S. Paol d'an Hebreed

Mam breuder, Jezus-Krist daet evel Beleg bras ar madoù da zonet, goude dezhañ tremen dre an tabernakl uheloc'h ha bravoc'h, dre an hini n'eo ket ket bet savet get an den, da lâret eo an hini ned eo ket ag ar bed-mañ, a zo antreet ur wezh evit mat get e wad-eñ ha ned eo ket get gwad bouc'hed ha leueoù e-barzh ar Santual goude bout gounidet deomp un daspren peurbadel. Rak ma c'helle gwad al loened pe ludu ag o c'horvoù losket strinket ar dud kousiet o santelaat en ur reiñ dezhe glanded a gorf, gwad Jezus-Krist hag a zo en em ginniget e-unan, dre ar Spered peurbadel, profadenn dinamm da Zoue, a naetay hor c'houstiañs ag an oberoù marv evit ma c'hellimp servij an Doue bev. Rak-se emañ-eñ eo a zo hanterour an Testamant nevez : en arbenn ag ar marv en deus anduret evit paeiñ dle ar pec'hedoù graet dindan an Testamant kentañ e roa d'ar re galvet ar galloud da resev ar bromesa, an heritaj peurbadus. Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

## Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezus-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.

**R/ : Ha get ho spered !**

## Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)

D'hon douar, roit peoc'h an Ne !

## Kent ar gomunion :

Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an hini a lam pec'hed ar bed :

Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,  
met lârit ur ger hepken hag e vo aeset din.**

## Komunion :

1 Adoromp holl, er Sakremant ag an aoter,  
Un Doue kuzhet, Jezus hor Mestr hag hor Salver !  
Get hor bouezh, hor c'halon, hon oberoù santel,  
Meulomp erhat un Doue a ziskenn ken izel,  
A ziskenn ken izel !

2 O ma Jezus, aveit reiñ deomp gwir koñfortañs,  
C'hwi 'n em laka bemdez dindan an aparañs,  
Plijet geneoc'h reiñ deomp holl ho tonezonoù,  
Ha skuilhañ ar ho pobl ho pinvikañ grasoù,  
Ho pinvikañ grasoù !

3 Aeled an neañv, amañ diskennit, m'ho kouvi,  
Daet da sekour kaniñ da Vab Doue meuleudi ;  
Gloar ivez d'an Dreinded, tri person en un Doue,  
Gloar bremañ ar an douar, ha gloar berped en ne,  
Ha gloar berped en ne !

## 'Cit kloziñ an oberoenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

**R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :

An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

**R/ : Amen !**

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :

**R/ : Bennozh da Zoue !**

## Kan-dibenn :

Ni Ho ador, Hosti sakret,  
C'hwi zo 'veidomp un Doue kuzhet,  
Ennoc'h, Jezus, dre garantez,  
Zo korf, eneañv, gwir den, gwir Doue.

Ni Ho ador, Gwad presius,  
Diverret a vambroù Jezus  
Aveit gwalc'hiñ hon eneoù  
Kousiet dre hor pec'hedoù.

Soñjomp get grad ha get respet

É Basion hag er marv kalet

En deus bet gouzañvet Jezus

'Veit hol lakaat da vout eürus.

## Gwerz gouel ar Sakramant : (diverradur)

Meulit, Sion, get levezet ho Salver,  
ho Mestr hag ho Roue  
get ar c'haerañ kanennoù.

Meulit Eñ kement' ma c'hellit,  
D'Er meuliñ erhat ne spir ket  
An holl meuleudiou.

Kanomp hor c'haerañ gwerzennoù,  
Levezet leun hor c'halonoù :  
Ya, kanomp a vouezh uhel.

« Evel am eus graet, 'lâr ar Salver,  
Grait-c'hwi ivez e pep amzer  
Get soñj a ma c'harantez. »

Hep gwelet na kompren, er feiz  
E ra krediñ ur wirionez  
A zo dreist pep spered mab-den.

### Allelouia :

*Me eo ar Bara bev diskennet ag an neañv, a lâr an Aotrou ;  
Ma tebr unan bennak ag ar Bara-mañ, e vevo er beurbadelezh..*

Ar beleg : *An Aotrou Doue geneoc'h* : **Ha get ho spered.**  
Ar beleg : *Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mark.*  
Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

**Aviel :** *An deiz kentañ ag ar Bara-dic'hoell, an deiz ma veze lazhet an oan-Pask, e lâras an disipled da Jezuz : «D'e-men e faot deoc'h e yahemp da aozñ an traoù deoc'h da zebriñ ar Pask ?» Hag eñ da gas daou ag e zisipled en ul lâret dezhe : «Kerzhit e kêr; arriv a ray geneoc'h un den é tougen ur podad dour. Kerzhit d'e heul, hag en ti mah ay tre, lârit d'ar perc'henn : «Ar mestr a c'houlenn geneoc'h : E-men emañ ar sal lec'h ma c'hellit debriñ ar Pask get ma disipled ? Hag eñ a ziskouezo deoc'h ur sal vras d'al lein, kempennet prest-kaer. Eno enta aprestit pep tra evidomp.» Ha setu ma yas an disipled e kêr ha ma kavazont an traoù evel m'en devoa el lâret dezhe, hag ec'h alejzont ar Pask. E-pad ar pred, Jezuz a gemeras bara, ha goude bout lâret ur vennigadenn, eñ en torras hag er roas d'e zisipled en ul lâret : «Kemerit, ma c'horf eo kement-mañ.» Ha goude-se e kemeras ur c'halis, e lâras ur bedenn a drugarez hag er roas dezhe hag holl ec'h evzont anezhañ. Hag e lâras dezhe : «Ma gwad eo kement-mañ, gwad an emglev, an hini skuilhet evit e-leizh a dud. E gwirionez, m'el lâr deoc'h, ne evin mui a frouezh ar winienn betek an*

Setu daet bara an Aeled,  
D'hor magiñ àr an hent d'an ne,  
Bara miret ar vugale ;  
Nend eo ket 'veit al loened.

Kalz a-dreñv en doa er spizet,  
'Vel Izaak sakrifiet,  
Oan Pask 'tre an dud lodennet  
Hag ar mann roet d'ar Yuzevion.

Bugul mat, bevañs a vuhez,  
Jezuz, doc'homp ho pet truez :  
Magit, difennit-ni bemdez,  
Roit deomp kavout pep levezet  
Geneoc'h en ho eürusted.

Ô C'hwi hag a c'hell ober pep tra,  
A venn er bed bout hor bara,  
Roit deomp, en-dro d'ho taol, enta,  
En Neañv kaniñ Allelouia  
Get ar Sent hag an Aeled. Amen.

*deiz mah evin hini nevez e Rouantelezh Doue.» Goude kan ar salmoù eh azont er-maez hag e kemerazont hent manez an Olived.*

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :  
**R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

**Kredo :** **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, deuet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv.  
Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

### Pedenn hollbedel :

**Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !**

**Lid ar profoù :** *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

**R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

### Prefas :

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :*

**R/ : Ha get ho spered !**

*Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :*

**R/ : Emañ troet trema Doue !**

*Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :*

**R/ : Just ha santel eo !**

### Santel :

**Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !**

Lan eo get ho kloar an Ne hag an douar : **Hosanna e lein an Ne !**

Ra vo benniget ho Mab Jezuz-Krist : **Hosanna e lein an Ne !**

**Gorreoù :** **Degas 'reomp da soñj ag ho marv,  
Aotrou Krist savet da vev,  
Ha gortoz a reomp ho tistro.**

**Hon Tad :** hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,  
Ho rouantelezh degaset deomp,  
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.  
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,  
Pardonit deomp hor pec'hedoù,  
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,  
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion  
Met hon diwallit doc'h an droug.

*Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :*

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**